


CANTIC SPIRITUEL

COMPOSET A NEVEZ

E gloar Doue hac en enor da S. THELAU ha da S. MÆN, a beder en eur Chapel a so en Escopti Querne, e parres Plogonnec, dem-dost da Loc-Ronan Coat-Nevet.



VAR DON : *Santes Mari, mam Doue....*

1

Tud devot a Vreiz-Izel, tostaat da glevet
 Eur c'hantic spirituel so nevez composet,
 En enor d'hor Patronet S. THELAU ha S. MÆN,
 Mignonet bras da Zoue, sicour ar gristenien.

2

Dreindet santel, prosternet dirazoc'h d'an daoulin,
 M'ho ped da rei sclærijen d'ho servicher indign ;
 Da zisolei un tenzor eus ar c'harrassou santel
 So etouez ar Vretonet, ebars e Breiz-Izel.

3

Ha c'hui ive S. THELAU ha S. MÆN beniguet,
 Me ho ped a vir galon da rei din ar speret,
 Da buplia ho calloud ha discleria 'r grassou
 A ellomp obten dreizoc'h, en hon oll ezomou.

4

'Bars e parres Plogonnec, en Escopti Querne,
 En un andret dudius, exposet d'ar c'hreis-de ;
 El leac'h-se, christenien, a veler eur chapel,
 Unan eus ar re gaera a so e Breiz-Izel.

5

È amzer ar Roue mad, Lois ar c'huezecvet,
 Ar plaç santel-ma a voa meurbet darampredet ;
 A Guerne hag a Venet, a Dreguer hag a Leon,
 Teue di pardonnerien gant guir devotion.

6

Un dudi a voa guelet tud devot Breiz-Izel,
 Ar joa en ho c'halonou o vont d'ar plaç santel,
 O vonet da visita S. THELAU ha S. MÆN,
 Guir sicour ar Vretonet 'n ho foan, en ho anquen.

Quement vije affliget a gorf pe a speret,
 Er chapel-ma, christenien, e cavent oll remed,
 Ha me a ell assuri gant guir fidelite,
 E teuent joaüs d'ar guer en eur veuli Doue.

Bez' o deus dirac Doue ar memes galloud c'hoas,
 Da barea 'r c'hlenvejou, d'ober miraclou bras,
 Mes goulennomp da guenta a greis hor c'halonou
 Ar c'hrass da blijout dezo, da heuill o vertuziou.

Evel an daou Sant bras-ma, bezomp guir gristenien,
 Bugale vad da Zoue ; bezomp mad d'ar beorien,
 Carantezus 'vit an oll, er beo hag er maro,
 Calonec ha stard er feiz, ha fervant eveldo.

Var tour caër ho ilis eus an Ee disquennet,
 Roit ho pennoz d'ar vro oc'h eus quement caret,
 Roit ho penediction d'an oll bardonnerien,
 A zeu bep bloas d'ho pedi evel guir gristenien.

Roit ho penediction d'an dud paour anqueniet,
 D'an dud a vor, a vresel, ha d'an oll Vretonet ;
 Roit ho penediction ive d'hor berejou
 E pere e cousq e peoc'h hon tadou hor mamou.

En eur achui, ho pedomp eus a greis hor c'halon
 D'hor receo oll brema en ho protection ;
 Pedit an Autrou Doue d'hor sicour nos ha de,
 Hac en heur eus ar maro da receo hon ene.

F. C.

FIN.

PERMIS D'IMPRIMER :

Quimper, le 25 Juillet 1878,

J. JÉGOU, vic. gén.